

DEZREVELLOÙ AN DUD KENFINET

RÉCITS DE CONFINÉS

*Barc'het en ti, kraouiet en ti, kenfinet
Padal, un heol o parañ an oabl glas.
Emañ un gouelan gris hag un gouelan maskl du
O c'hoarzin war an oad
Un toullad labous ez a da gavout anezho.
Unan o nijal.*

*Den ebet 'zo war an traezhenn
Difenet eo da vale war an oad vev,
Dindan boan an till-gastiz
Gallout a ran sellout ouzh an arvest-se
A-dreñv ar werenn eus va zi nemeken.
Gortoz a ran, gortoz a ran, gortoz a ran
Devezhioù gwelloc'h,
Pa vez aet kuit ar c'hlañved-red.*

*Mont a ran er maez gant va testeni dilec'hiañ
Un eurvezh da bourmen e frankiz
Evel al laboused
Met n'eo ket posubl da vont pelloc'h
A wall d'ar c'hlañved-red
Gortoz a ran, gortoz a ran, gortoz a ran
Devezhioù nevez.*

Carole

